

ZON

TAOLEN AR IAOUANKIS

COMPOSET WAR SUJET

Eur Zoudard hag he Vestres

Moïzes ha Jeremi, David ha Salomon
 Mercur hag Appollon, Saturn ha Cupidon,
 Me a c'houlen d'am zikour puissanso ann douar
 Pharamon, Charlamagn, Napoleon ha Cesar,
 Neptune ha Jupiter, Auibal ha Brutus
 Ker Rom a oa bet fondet gant ar prius Romulus,
 Goude goul talanchou roue ar profetet
 Me a c'houlen d'am zikour ann oll rouanezet ;

Sibel ha Cleopatr, Nitokrisa ha Junon,
 C'houi peuz bet epad kant vloaz en Eryp ho tron,
 Pa oc'h peder rouannes ha mammou ann amour,
 Divoar ben ma daoulin, me a c'houlen zikour,
 Me a c'houlen o puissans da c'halout komposi
 Ar peuz zo em zintimant hag ive em fantazi,
 Ha me brezanto dec'h *Tolen ar Iouankis*
 Ha portret Vénus barz kreiz he c'honestiz,

Bars ar ger gopital deuz rouantelez Frans,
 Chilaonit ta, tud yaouanq, mont a ran da gommans ;
 Me ma laket ma speret da garout eur plac'h iaouank
 Hi he deuz laket hanon 'bars ar brassau tourmant,
 Hi en deuz laket 'hanon 'bars er brassau souffrans,
 Hag ar maleur pen-da-ben zo ive eneb va chans,
 Kentan ma bet ann enor da velet eur sort fleuriz,
 E voa ebars p'asen ar Victoar er ger vras a Paris.

Heno me hi remerkis leun a dristidigez,
 Er kreiz eur bobl enorm hi voa eno esclavez
 O velet anezi ken grasiuz hag he speret okupet,
 Me zirijaz ma fajou, vit monet d'he c'havet :
 — Bonjour d'ec'h plac'h iaouank, ma ve dia permetet,
 Ma ne pe disprizans vit dont guani da briet,

000220

Rag herve guelel ho costum me zo deut da gredi
Hoc'h natif deus a Noriant pe deus a Bontivi

— Me o merci, den iaouank dimeus ho kompliment,
Me n'hon na deuz Pontivi, na deuz a Noriant ;
Mes me a c'houlou diganec'h, mar be ho madelez,
Da donnet assemblez guenin da basseal an devez,
Rag me n'euz ket goel bel zo ha ma hon arruet.
Muioc'h a plija tur a me, ma vefen konduet.
Ha va bonheur a reposo 'barz kreiz va diziriou,
Aman me oa ma unon ha Breman ni vezo daou.

— Ha ma avantur ne ket fal, 'vit ann devez hirie,
Pedi ran ann Esperans evit ma c'honsolo ;
Kemeromp eur gariolen ha demb ni da bourmen.
Da guemer ann er voar ar maez, pe z a rei vad d'hon pen ;
Kalz a c'hoant ma da c'houd ar pez na ouient ket,
Hac en ebarz eur spernen or formet eur boket
Rak o voelet anezi ho ton em c'hompagnonez :
Ann dra-ze dime re da gredi, ne oa ket eur seurez.

Mes pec'hed eo laret netra divoar ben den 'bet ;
Breman c'houlennan iskus deuz ar pez meus laret,
Mez gout a ret, ar merc het koant, zo leun a garantez,
Kis ar merlg deus an dir hag ar spoen euz ar goez,
Loskomb breman, kement-se, vit goude hag en he guir,
E meus ar meumeuz zantimant hag ar memeuz dezir ;
Tremen refomp hom amzer hep tournant na chagrin,
A demp-ni da goad Boulogn dre eur sulvez vintin.

— Me a meus confians vras ebarz ar Vretonet,
A me ho heuillo enn kement plas ma lersfet,
Ebars eun den deuz va bro me lako va fianz,
Pa c'homb n'em gaed hon daou, 'bars e kapital Franz,
N's vank mert kaet kourac'h da soign ho hiritaj,
Ha c'hui pezo, goude-ze, ar bonheur 'vit partaj,
Bars e Paris ni dremeno hom oll blijaduriou,
A me bourmeno 'bars ker dre drouz ar muzikou.

— Harsa eta, plac'h iaouank, ho konzo zo leal,
C'hui 'peuz ar galiteo vank 'vit dont da gozeal,
Mes 'ta mar d'eo guir c'heuz hennon bras konfianz,
Me na c'houlennin netra mert ar preferanz,
Ha ma vefac'h fidel din keit a vin er servich,
Berroc'h kaffen ann amzer barz he ruiou Paris,
A ma c'hassen d'ar brezel, c'hui bedo evit-hon
Hon Doue a viserikord vit dont d'am froteji.

Mes ann noab oa ken pur, ne voa ket eun nuagen.
Hag an eol ken brillant ha dol e sklerigen ;
Ar fleur, ar lapouset, ha mister a c'hoajou,
Ar mumur deus an douar o redeg bars ar gwaziou,
Net ket 'ta. me o ped, da droubli o spered,
Pa n'eus Doue akordet, eur bonheur desiret,
Dre ar gliz euz ar mintin a gan ar lapouset,
Kiz ar baradoz terrest e kommansamant ar bed,
Ho Roue deus ar firmamant, Gouarner an douar,
C'houi a gommand ma bonheur pelleit diouzin glac'har
Rak me zo brema en lec'h vit formi eun histoar,
Me c'houl furnez gant Salomon ha kouraj gant Cesar,
'Vit ma c'hallin disklerian bue va iaouankis,
Ar pez zo gueni erruet bars er guer Baris ;
Bremen eta plac'h iaouank. arretomp aman
Hag ann deillo deuz ar goen deuiio d'hom dizheoillan,
Mes allas ! ar blijadur da dont hon daou assemblez,
Me gred e man o prepari eun dristidiguez
Rag me e meus evidoc'h eur gu'r garantez,
Me o ped 'ta. goude-ze da gaout ouzin truez,
Rag c'houi a deui d'am dilezel kement-ze zo skler.
Rak me a vo c'hoas zoudard, pad eun neurbed amzer,
Me zo c'hoas dindan an drapo, o c'heuil va rejimant,
Me meus ket va liberte, truez eta, plac'h iaouank.
Neuze e kemeras va dorn, o kommans da oelan,
Hag a respontaz ac hanon gant eur voes a greean :
—Pussubl vo 'ta den iaouanq, e vefen ken kruel,
Ma vefen ket rekompanset gant Doue eternal,
Me zezir kaout eun den hag a garo ac hanon ;
Hennes nevo va fidelite e kis ma verito,
Hag evit gortoz ann deiz, ma po ho liberte,
Ni vo bet ho pourmen an eil gant eguile.
Me o ped ta plac'h iaouank, assuret ho comzo.
Rac 'bars jardin an amour c'heuz konduet ac hanon ;
M's neket avoalc'h chom aman da gonta mervaillo
Poen eo dimp mond d'an oferen-bred, me o konduo
Eno dirag ar Birner, ni rañ ho fromesso,
Da zouguen fidelite beteg dor ar maro :
Neuze e oamp antreet 'bars er guenta illiz
A gand eun devosion vras he klevis ann ofis,
Dre musik an aogrou, eur voez selestiel
Ni a boa gret ho fromesseo dirag ann Aviel.

Pa oa achu an ofern-bred me a oa deut er mez
En toul dor a c'hreis deiz, e oan chomet d'he gortoz,
Ha pa ma guelec anezi o ton emez an iliz
E oa ken kær a kent koant hag eur fl-urdiliz.
He daoulagad oa kent brillant hag e bisaj a fleur,
Da vont bars 'tal e c'hichen vidon pebez bonheur !

Goulenn a ran breman d'ann oll batriarchet
Da rei eloquans d'am moez ha kourach d'am speret
Rag me a zeu da zaludi prinses an oll verc'het :
Hi zo brillantoc'h 'vit ann eol, kaeroc'h 'vit ar steret,
A c'houi, doctoret an douar, prestat d'in ho talant,
Me a c'houlen ho sicour Roue ar firmamant,
Ha d'ann heur da greis deiz me ho saludo
Pa unisso an *Angelus* gant trouz ar c'hanono.

Bonjour dec'h. Dimezel, nijet deus an envou.
Doktrinez var an douar ha prinsez ar fleurjou,
C'houi eo ann agreaplan plac'h zo krouet gant Doue
Me n'on ket dign da prezanti dirag ho majeste :
C'houi, gant ho er grasiuz hag ho kalon loyal,
Glefe bean saludet gant a brinset loyal
Mes pa m'eus bet ann hardiez da zonet d'ho kavet
Me vo ar malharusa den ma na ven ket estimet.

— Na ne ket red dec'h kaet an talanchou-ze
Vit dont da saludi eur plac'h a guis dime,
Rag c'houi a zo destinet d'ar brassa obeissans
A prest da skuilla o coad 'vit rouantelez Franz :
Ebars creiz a c'hombajo, pa vo criet viktoar !
Hen a laka da grena ann env hag an douar,
Rag eur zoudard vaillant 'vit rei gloar d'he drapo,
A ankoa tad a mamm 'vit monet d'ar maro.

— ' Vit eur plac'h a galite, c'hcui no ch ket difcil,
Ken mo bet ho teziriou me na vin ket trankil ;
Ha pa ve red din avanturi daouzec goech va buez
'Vit kaet an assurans domeuz ho karantez,
Nag ive kombati enep kant va unan
Kement ze zo netra vidon m'ar o lakfen contant ;
Rak guelloc'h ve d'in bean maro, a guanec'h karet,
Kent 'vit beva var an douar ma ne ven ket estimet,

Doussa tra zo var ar bed ez eo ar garantez
Pa ve daou den hag en em gar ann eil hag eguile,
Peguen evurus vefe an dud ma karfen 'n'em gared,
Ne ve guelec var ann douar netra mert mignonet.

Hag an den ken uniset, pa ve erru koz,
N em gafe eurussoc'h antren er baradoz ;
Mes mar 'och va servijer me so ive ho mestrez,
He c'ham da bardon Zint-Cloud, da dremen ann devez.

— Charmet hon, plac'h iaouanq, huel eo ho fidelite,
Mes gulet euz eol d'ar mintin ha glao d'ann abarde,
Hag ar merc'het zo memez-tra gant ho fromesseou,
Ar pezh e ve laret dec'h, ve disclaret hiriou,
Kouskoude c'heus klevet laret ha kement-se zo guir,
Guelloc'h eo teod eun den mud vit eun teod re hir,
Mes huellet ar volonte vad deuz ho santimancho
Ken a vin var douar, c'hui ann hini em c'haro.

Neuze e partiam hon daou kasel a kasel,
Vit kemer an kent-ouarn entre Paris a Versail ;
Ebars ar guer a Sant-Cloud, eno, voamp diskennet,
Dre eur zulves a c'haeran, goude ann ofern bred,
Ann amzer a voa skler, an eol a voa brillant,
A trao an douar oa zeder dindan ar firmamant,
Ar rossignolet a gane 'bars an huelder,
Hag ar c'halono oa joaüs 'bars er memez amzer.

Ar musiko royal a sone bars ar palez ;
Me c'houlen ho santimant, breman 'ta va mestrez,
Kourac'h eta, plac'h iaouank, din eo ar victoar,
Biquen. ne viut separat keit e vin var an douar,
C'houi c'heus eur guir momen 'bars kreiz ho kalon,
'Vit renta din an dour a gonsolation,
Ha pa meuz kavet ar feuteun dimeuz ho karantez,
Me na c'houlan ken netra nemert ho polontez.

— Na peuz met lakat ho speret da regli ho santimant,
Goude karout ha bean karet c'hoas noc'h ket koutant,
Ni meum gret or fromessou, laket Doue da dest,
Hag or planeden var ar bed zisido ar rest,
Ia, deuz greiz va c'halon, me fet da gombatti,
Ha prest da skuilla va goad, semblez gant o c'hini,
Mes ar momet zo erru d'entreal en Paris,
'Rog a vo z'errred an or gant an dud a bo'is

— Setu aman, va mestrez, vidoc'h eun dilijans,
Pe eur c'hourier reservet mar he ho preferans,
Pe demp-ni d'ober o choas barz touez ar haroso
A ni a bo eur c'hocher, hag hon c'honduo,
Ha me a mo c'hoas eun heur rog dont d'ho tilezel,
Kointampli va plijadur, 'barz etal ho kichen,

Interoji ho pisaj, ha douster ho zellou,
Kaeroc h vit ar sklerijen deuz ar flammou ar golou.

Agreaploc'h vit ar fleur, doussoc'h 'vit ar zei,
Impossubl ez eo d'eun den chom hep karout anei,
Hi dolou sclerijen, dre l'ec'h a dremenno,
Hag ann dud var e fasaj kasi a daoulino,
He furnes hag e spered a c'heuil e fuissans,
Na gredan ket ma e fars bars rouantelez Frans,
A pevar c'horn an Univers hi dol ar sklerijen,
Kis an eol o sortial deuz dreg ar goummoulen.

Hi a deuz ar galite a vankte d eur brinçes,
Ne vank dei met eur gurunen vit bean rouanez ;
Pe gant eur Vest Souveren ma ve dija barnet,
Hi ve laket da rouanez var ann oll Ellezet,
Setu aze, tud iaouank ar portret Venus,
Ar puissanso deuz ar bed n'int qet vit hi zreus ;
Neuze oamp autreet triomphant en Paris
Pa oa formet gan nimp *Tolen ar Iaouankis.*

Ha kontantoc'h omp da vezan var ann douar,
'Vit ann oll ellez eurus barz puissans ar gloar,
He dorn 'barz va hini he hano zo gravet,
'Bars ar fons euz va c'halon keid vin var ar bed,
Hi skuil 'bars va c'halon an oll plijadurio,
Guelet ar c'hoars agreabl var e muzello,
Oh ! Divinite. plijadur, jea ann envou
C'hui rejouis aon elez gand he faveuriou.

C'houi sperejou koachet hanvet ar misterio,
Pa separin deuz va mestrez, konsolet ac hanon.
Rak pa deu da jonj d'in d ar separation.
Me zant ann tolliou lans oc'h antren em c'halon :
He fresans hag he imaj gret evit senti,
Lakat oll dud ar bed da zoot dhi adori :
Netra nemet he skeut, p'ha var ann dachen,
Zo kaeroc h vit an dour pa gouez deuz eur Blomen.

— Breman eo va zro den iaouank 'ta arretet,
Ma mije laret ze dec'h, c'houi vije fachel :
Dre gousekans, me o ped reglet ho comzo,
Me gred oc'h e klask tu d'ober goab ac hanon.
Car me n'on met eur baisantes hep mado :
Den na deui da fleuria ma bez pa vin maro !
Gant ma zud, da guenta losket enn ambandon,
Den ebet n'euz kemeret zoursi ac hanon.

Ma meus vel eur goukries Gourin kuiteet,
'Lec'h bean karet hon bet pepret repousset ;
Ma meus bet kuiteet ken iaouanq-se va bro.
Va liberte n'euz koustet din meur a daëlou,
Mes pa hoc'h an den kenta okup ma malheur,
Carfen bean princes vit ober ho bonheur,
Ma ve red dec'h combatti ho adversourien,
C'houi po eur gamaradez e tal ho kichen,

— Merci ta, plac'h iaouank deus ho fidelite,
C'houi zo dign da vean mestrez varn hon-me,
Netra nemet klevet hanoc'h o koseal,
A ra din gout peuz studiet levriou moral ;
Doue 'neur ober diouzimp paisantet.
Neuz reatet dimp bepret kalon d'en em garet,
Hag oll a c'hallomp kaet kement ar furnez
Evel ar c'henta prius deuz ar rouantelez.

— Skoet peuz gant ho komizo var dor va c'halon ;
En guis ar profet Israel c'houi ra o sermon,
C'houi vo rekompanset deus ar pezh veritet.
Na gollet ket ho poan ho tout d'am darempredet ;
Pa hoc'h deud d'am aJori, c'hui po ma c'halon,
Doue ha da disquen var n'omp he venediksion,
Ha d'hon kas d'ar barados goude hon maro,
Setu den iaouank, ar pezh garfen a vezo.

— N'euze 'ta plac'h iaouank, pa vefomp desedet,
A unisfomp assemblez hor c'horf hag hor speret :
Annonset ez eo gant Doue d'homp ineo,
C'homp laket assambles 'tre beket ar maro,
Hon daou El mad hon deus ac'hanomp saludet,
Laret deuz da zoue penos omp uni-set :
Meum ket nemet deuz Elez fall da n'em difen,
Enep da gant eler mond er lezen gristen.

— Trawalc'h eo kement-se 'vit an devez herio,
Ho servijeres a lar dec'h ken a vezo,
Gant eun desir d'ho koetet a lar dec'h bonsoar ;
Rak c'houi ma frotejo breman var ann douar ;
'Bars ru Zant-Honore, en numero pemzek,
Lavarfet ma c'hano a vefet respontet ;
A c'han-me brema, den iaouank, d'ho titezel.
Zonet eo anter-nos en iliz Mada'en.

— Lezomp anter-nos da zon, zaludomp an de,
N'omp ket prest da n'eum veled eur chans a ve ze,

Rag c'houi zo vel eur fluren var bord ann encho,
Ve das'umet buon, dre ma blij d'ar zello.

C'houi zo 'vel eur boquet roz e kreis ar joaio,
Prestik gand unan benag vo joget e zelliou,
'Vit klevit kement-se ne ket red dec'h fachan,
Me a lavar se dec'h vit ho avertissan.

Zaillet ra ma c'halon ho klevet ho komzo,
'Vel ra ar bandulen pa verk a momencho,
Nag a vefen kouezet bars ar brassan danjur,
Me brononso bepred hano va servijer,
A Doue gasso ma mouez beteg ho kalon,
C'houi n eun denno hanon deuz an abandon,
A bel 'vel deus a dost me songo enn ennoc'h,
Evit ho tilezel, mervel refen kentoc'h.

Mar geo zortiet se deus kreis ho kalon,
C'han da guitad ho torn gant eur gonfians don ;
Ken a-vo a lara dec'h breman, plac'h iaouanc,
Gras dec'h da gonservi ar memez-zantimant ;
Zur on dho velet c'hoas dirag ma daoulagat,
Evel hoc'h, er momet man pa han dho kuitad,
Ken-a vo 'ta laran d'ec'h, ma mestres koant,
Ra vo enn ho kalon ar memez santimant

-- Oh ! me a souhet dec'h kement a zouhetet din,
A me o ped da sonjal bapret diouzin,
Larout ran dec'h bonsoar dre ar meumeus diskour,
Ken a-vo deat an deiz da laret dec'h bonjour,
Enn deiz bras ze ma c'halon vo er joaüsted
Breman ob ma Doue a hon bras kontristed
Ken-a vo ta gant va oil bolonte vad,
A hon forset kouskoude da zont d'ho kuitad.

— Pa devoa ma mestres dilezet ac'hanon,
Me a voa c'hoas em flas o sec'han va daelou ;
A ben eur momet goude pa zavis va fen,
Me a remerkas diou goulm ebars en noabren,
Ann eil diouz e ben a bellae buon,
Separet a voant Jesus pebeuz vision !
Ze voa va flaneden, lennet din gant Doue,
'Vit kreskin va souffrans a zo bet kri goude.

Dre sklerijen loar ha flumbo ar steret,
A dre urzo Doue me a oa separet,
Lavaret mam ken-a-vo ann eil d'eguile,
Ar zulvez memorabl passeaz an noz se ;

Breman ma en servij ar brinsez Dardenel,
Evit difen anei me zo prest da vervel ;
Ma vije lak-t voar e fenn eur gurunen,
A lakafe a eol da goll he sklerijen.

Va mestres zo kaeroc'h, pa ve voar ann dachen,
'Vit princes Mezalin, rouanez ar Romen,
Kouskoude a resev. gand gras a gant furnez,
Daouzee a-tri-ugent prins bars porz he fallez ;
Mes oll joaio ar bed na nint met jalousi,
Ha me n'non vit kareut met an ini plij din,
Pa gouitaen ma c'hasern 'vit monet da bourmen,
Me vijen em flijadur met en tal e c'hichen.

Goude bean prometet din kaet vertu.
Na vin-me ket contant nemet pa vin achu,
Ken vin arri er bud meus laket em speret,
'Pad ma vin var ann douar repos na mo ket ;
Piou alfe laret, he zorn voar he gonsians ?
Me a finisso ar pez a hon ho kommans !
Kals a valeuriou a arri 'bars ar bed man,
A den bet na voar ar pez arrio gant-han.

Ebars er bed-man na neuz nemet treitourez,
En kavel an inosant ep ken man a furnez,
Divoalet tud iaouank da droubli ho repos
Ha donnet da clask ar mintin pa ve noz,
Peuz met sevel ho taoulagad var zu ann envou,
Ann oll goumoulenno dremen na doug ket ar fleurio,
Hag ar brommesseou groet hep bean dalc'het,
Eo ar brassan pec'het zo en touez ar merc het.

'Bars eur jardin, ornet gant ar bravoan fleurio,
Lec'h ma ve er mintin ar gliz var an dellio
A bourmen eur plac'h yaouank n'eur gana eur houblet,
He mouez a n eur vesk gant hini all lapousset,
Prestik e zent d'an natur harsset gant ar musik,
Mes ar plijadur zo ber hag ar joa rapid,
Ha n'eur lako ma mestres da skuilla daëlo,
Boket ann amitie nevo ken a zeillo.

Me ho ped, plac'h iouank zec het ho taoulagad
Ma peuz va dilezet eo dre volonte vad,
Hoc'h oll daëlo n'int nemet evit ober feson
Ha vit kusan traïson zo barz n ho kalon ;
Na gleez n'em fiout barz n'ho promesseo
Ken a ver unisset dirag ann autoriteo

Kouskoude enn-hoc'h a ma laket ma fianc
A tourmant a red din evit va rekompans.

— Dont a red 'ta den iouank d'am akozin,
Ha da clask, h'welan, ober poau vraz din,
Nag a vefen treitourez vel ma peuz laret
Noc'h ket na barner eun de na juge var ar bed,
Ann injuriou red din zo fall dirag Doue.
Rak peb hini a zo mestr da heuil ho bolante ;
Gras dec'h da gaout e lec'h all ho polantez
A da gaout viti ar memez karantez

— Ket arog 'ta plac'h iouank moc'h dizantimantet,
Bet eo ann teodou-fall o prezec voar va zujet ;
Oh Doue ! roet din ar brassan faveuriou
Evit ober eur c'hompliment d'ar goel deodou :
Ann teodou fall zo kaus d'an oll brezellou
Petra zistrug ann dud hag a zec'h ar c'herriou ;
Int o den ho c'haliteo mad d'an dud fur
Hag e plas ar bonheur lak an displejadur.

Petra zervic'h din dikriel an dud vil-se
Fallan tra c'hallont laret so gret evite
Travalac'h ha ve var sujet ar goel deodou :
Peb lec'h voar ann douar glever ho c'homzou
Bemdeiz ve eun exempl dirag ho daoutdaga.
Ar re zileo gant-he zo ive ken koupabl ;
Vitic'h-hu plac'h iouank, a laran kement-ze
Rak c'houi zo bet ive en conferans gant-he.

— Me o ped, den iouank laret ken-a-vo d'ho mestrez,
Homan eo ann diveza goech homp assemblez,
Goude bean bet daou-vla en em adori
A lakafomp kement all vit n'em insulti
'Vit ampech kement-se me lak ma zantimant,
Da vont da achui va bue en eur gouant,
Var kement-ze, den iouank, a toa dilezan,
En em gousolet me a rei ma fluijan

-- Possubl eo plac'h iouank a zistesfec'h hanon
Refec'h ho interramant arog bean maro
Pa vo kanet var ho pezh ar c'hantikou latin
A vefet divoet da gaout nec'h a chagrin ;
Oh ! me o ped ta da drei ho keint da gouant
Kapabl a hoc'h de vont enep d'ho zantiman
Noc'h ket evit kompren a guement hirvoudou
Zo en kalon ar merc het 'barz ar c'hoenchou.

Awalc'h ! rak-da anter noz, na da greiz-de
Na vefomp unisset ann eil gant eguile,
Goel a r-omb voar an douar katz a verc'het
'Bars an houaoucho-ze a zo en em vouet,
Pa deuz groet ho sermant evit bean seurez
Lec'h bean eno kuset a garfen bean er mez :
Ganec hu, plac'h iaou ank, a c'hoarve kement-se
Noc'h ket 'vit lakat gaou lec'h man ar guirione.

— Na deut ket ta, den iaouank, da goll esperans,
Marteze gand eun all c'houi a po muioc'h a chans,
En ker Paris, da choaz, m'erc'het c'hvi a gavo
Po me laret merci goude ho c'houlenn ;
Neuze gand ar Brovidans veed recompanset
Nag a pe kollet o poan d'em darempredet ;
Pedet an oll zent da zoulagi ho mizer,
Rak ar paour neuz netra met n eur laret he bater,

— Ked arog, 'ta plac'h iaouank, ket arog plac'h ingrat,
Ober a red goab hanon dirag ma daoulagat,
Kement se zo rein d'eun den re a souffrans
Tec hel euz va mestrez a lac'h va esperans
Setu me evel eun den kondaonet d'ar maro
Mest ar varo general c'hui em resussito ;
Mes nag a pefe eur galon kaletoc'h 'vit eur min,
Na fot ken met eur soudard da ober c'houarzin.

— Ked arog den iaouank ma oc'h disgonsolet,
Kouskoude a wejo gaver a pez ve kollet
Pa deu e kreiz ar gouan ann eol da doman
Voar lakat a lapouset da dont da gaaou,
Kalon an dud iaouank gleje bean memeus tra,
Goude an dristidiguez gleje dont ar joa,
Mes d'hon amitie zo fin, ann disfians a gommans,
Laret ken-a-vo 'ta neus ken a esperans

— Marteze 'ta plac'h iaouank, eo guir kement-se,
Laret a ret eta din ar guir guirione,
Kouskoude na gredan ket, herve ma santimant,
'Bars en kalon eun El 've formet eur serpan,
Lavaret e voa din bars ar bonaventur
Penos me a va mestres mijem plijadur,
Ha ma man 'bars ho kalon remorz ar gonzians,
C han da c'houl ganec'h ann divezan esperans.
Ma ve red nem separi ann eil deuz eguile,
Hallet finis va bue gant eun tol kleve,

Setu-me d'an daoulin dirazoc'h prosternet,
Rei din ho benediction rok kuitad ar bed,
Ha mar zo 'n ho kalon netra nemet malis,
C'houi ha dober eur boureo deus ho iaouankis,
Mes ar pezh c'houlan diganec'h em zestamant,
Eo doug'fet eun habit du em interramant.

— Breman welan, den iaouank hoc'h eun den a gouraj,
Miret ret eur plac'hik da vont d'he ermitaj,
Mes lec'h bean ped ma vue enn devalijen,
Gant va zervijer me vo pourmenet voar ann dachen ;
Me douo ma ve red dirag ar c'hrusifi,
Ma me ket hanoc'h me chomo h-p'hini,
Brema a meum eur vuez nevez da gommans,
Zavet 'ta va sevijer achu eo ho souffrans

Voa ket red dec'h, vit-se, kaout ambition,
Ne voa met eur gouent o sisput ma c'halon,
A pa hoc'h bet victoriuz voar ma zilvidiguez,
Ne c'houlan ket netra nemet a briadelez,
Neuze vefomp assembles beteg ar maro
Goude bars ar memez bez hefomp da repos,
Hag evit gortos ann deiz euz ar varu divesa,
Gras dimb da n'em voelet 'bars draouien Josepha.

— Neuze 'ta va mestrez, demb hon daou d'an iliz,
Hag a fuisso ma zon voar ma iaounnkis,
Mar oc'h e clasq piou a neus komposet ar zon,
Man breman forestour 'bars koad Tou' a laëron,
Pa neuz hi komposet a voa soudard iaouank,
Er grenadourien-Frans e divoued regimant ;
Eur zon n'eo ket goel difficil da gomposant,
Pez ve arri gand eun den ve ezet da gontan.

ROUZIC, Louis, dens Roudonallec.

FIN.

(Propriété)

Lannion, librairie M^lle. C. Duchemin